

INAUGURATION

DU

TOMBEAU DE SAINT YVES

REFRAIN.

Saint Yves, notre Père,
Toi que nous implorons,
Entends notre prière
Et bénis tes Bretons.

1.

Ta tombe est rebâtie
Plus belle qu'autrefois,
Et la foule ravie
Y prie à haute voix.

2.

Pour ton peuple fidèle
Qui tend vers toi les mains,
Grand Yves, renouvelle
Tes prodiges anciens.

3.

Le laboureur t'implore :
Féconde son sillon,
Donne-lui, donne encore
Abondante moisson.

4.

Guide sur l'onde amère
Le matelot breton ;
Tu sais, dans sa chaumière
On invoque ton nom.

5.

Donne à la main qui donne,
Et le pauvre sans lieu
A la table bretonne
Aura la part de Dieu.

6.

Vois la veuve craintive
Et l'enfant sans tuteur :
Ils t'adjurent, saint Yve,
D'être leur défenseur.

7.

Fais croître la science
Dans l'esprit des enfants ;
Et garde l'innocence
Aux jours de leur printemps.

8.

Que l'âme qui sommeille
A l'ombre de la mort
A ta voix se réveille,
Disant : je crois encor.

9.

Miroir, parfait modèle
Du prêtre et du Pasteur,
Arme-les de ton zèle
Dans leur rude labeur.

10.

Conserve-nous entière
La Foi que nous aimons,
La Foi vive et sincère
Qui fit les Saints bretons.

11.

Que l'antique droiture,
Gloire de ton pays,

Demeure toujours pure
Dans le cœur de tes fils.

12.

Du beau pays de France
Eloigne les douleurs ;
Conserve l'espérance
Et la paix dans les cœurs.

13.

Défenseur invincible
Du droit, de l'équité,
Pour le Pape infallible
Plaide la liberté.

14.


Entends notre prière
Et, nous t'en conjurons,
Sois à l'heure dernière
L'avocat des Bretons.

ROITELET.

(M^{re} Le Don)

Par M. L. P.

PARDON AR BE NEVE EL LANDREGER



War-don : *C'houi pere zo Kristenien.*

DISKAN :

Pa neo hirie ho Pardon, sant Ervoan vinniget,
Pedet evit ho proiz, evit ar Vretoned :
Hirie ann oll Vretoned ho pe ! a galon vad :
Reit d'he, otro sant Ervoan, reit d'he oll ho mennad.

Dre-oll enn Bro Breiz-Izel neuz sonet ar c'hleier,
Hag enn ho zourik huel e lerent ker zeder :
« Arc'hoaz man el Landreger pardon braz sant Ervoan,
« Pardon braz ar Be neve, et oll kuitibunan.

Deut omp, otro sant Ervoan, deut omp oll d'ho kwelet
Hag enn dro d'ho pe neve ni a zo daoulinet....
Nan, n'euz ket enn Breiz-Izel eur zant vel sant Ervoan
Ker kaer hag he ve neve ne weler ket unan !

Ker kaer hag he ve neve biken den ne welo !
Ker kaer hag at ar pardon-man biken hini ne vo !
Gwisket vel eur rouanez, iliz vraz sant Tual
A zo pinvik ha kempenn vel ne zo ket eunn all !

Aman ta eo interret ar zant braz a garan !
Aman eo deut sant Ervoan d'ober he hun diwan !..
Enn de ar varn diwean, e savo a-le se.
Skleroc'h he gorf da welet vit ann heol da greiz-de.

Aman zo bet miraklo, testo zo da laret :
Nag enn Breiz, nag enn Bro-c'hal, kaeroc'h ne oe gwelet !
Me wel c'hoaz ann dud varo, o sevel ac'hane,
Neur ganan da zant Ervoan bennoz ha trugare

Tud paour ha tud reuzeudik, tud dall ha dilavar,
Tud magnet ha gouliet, neuze war ann douar,
C'houi de war ve sant Ervoan, c'houi de 'neur skuil daero,
Ha jouauz ha iac'heet e tistroec'h d'ho pro.

Nag a dud, be burzuduz, c'heuz gwelet o tremen !
Nag a dud hoc'h euz klevet o pedi 'nn ho kichen !
Gwech-all rouane ar vro a deue dierc'hen,
Da glask ive ho mennad digant *Tad ar bevien*.

Gant ar Revolusion e tikoueaz, enn kaer,
Tud dife hag a dorraz eur be a oa ken kaer.
Ne vanaz gant sant Ervoan, a rez gant ar pave,
Ne vanaz met eur min ru, elec'h ma oa he ve.

Bennoz Doue d'ann Eskop¹ en deus-han adzavet !
Bennoz Doue d'ann Eskop² en deus-han binniget !
Breman c'hoaz ar Vretoned a dei evel gwech all
Da welet ho zant Ervoan enn iliz sant Tual.

Pa dei trubuil ha poanio, tud vad, d'hon enebi,
War ve neve sant Ervoan, diredomp da bedi,
Ha, frealzet hon c'halon, ni distroio d'ar ger,
En eur ganen meulodi sant Ervoan Landreger.

Nec'het eo ann intanvez zo manet 'nn hec'h unan :
Hirie eo diez zével ar vugale vian.
Sikouret-hi, sant Ervoan, ma vezo kalonek
Da c'hallout rei d'he furnez ha bara pemdeiek.

D'ann dud klanv a deu aman, enn iliz sant Tual,
Roet iec'hed ha bue, evel ma rec'h gwech-all ;
Bepred eo braz ho kalloud ebarz ar baradoz :
Gret miraklo evid omp, evel vit hon zud koz !

D'ar re a neuz ankoueet, enn hon bro Breiz-Izel,
Doujan d'ann otro Doue ha d'he lezen santel,
Leret hirie — hag huel — ô ma zant binniget,
Eo red senti ouz Doue, rok kad evurusted.

Leret d'he kerzet eunn etrezek ann Envo,
Ha bean gwir gristenien, vel ma oa hon zado.
O ! neuze ni a welo o tistrei enn hon zouez
Ar peuc'h hag al lealded, ha gant he levenez.

LAOUENANIG SANT ERVOAN.

1 Ann Otro Bouché.

2 Ann Otro Fallières.